

# AN ELEZ A GANE

Komzou : Job an Irien

Muzik: Christian Desbordes



1. An ê - lez a gan-(n)e \_\_\_\_\_ Be - teg war lein an neñv, \_\_\_\_\_ Pas - to - red a gle - ve  
 2. Ar ste - red a gan-(n)e \_\_\_\_\_ Ben - noz da Vab an neñv, \_\_\_\_\_ La - bou - sed 'zis - kan-(n)e  
 3. An a - vel a gan-(n)e \_\_\_\_\_ Stou - et war - zu an Tad, \_\_\_\_\_ Ha Ma - ri a be - de  
 4. Bu - ga - le a gan-(n)o, \_\_\_\_\_ Di - gor o dorn d'ar béd, \_\_\_\_\_ Bu - ga - le a heuil - lo



1. Tro - et war - zu an neñv, Hag an he - kleo a res - pon - te E - vid ar paour o c'he - dal aour:  
 2. 'N e - nor da Vab an neñv, Hag ar c'hoa - jou, ar me - ne - ziou A go - rol - le gand ar mo - riou.  
 3. Pu - chet 'ki - chenn he Mab, Hag an noz du n'oa mui teñ - val Gand sklê - ri - jenn eur ste - re - denn.  
 4. Ma - big ar peoc'h be - préd, Rag an he - kleo si - let en - no A jo - mo beo, ha - det en - no.



Gan - (n)et eo deom Ma - big ar peoc'h, Ha - denn an éd tao - let er béd,



Ha - den - nig paour ar ga - ran - tez 'Vid le - ve - nez eur béd di - zaour.

1. An êlez a gane  
 Beteg war lein an neñv,  
 Pastored a gleve  
 Troet war-zu an neñv,  
 Hag an hekleo a responte  
 Evid ar paour o c'hedal aour :

**Diskan :** Ganet eo deom Mabig ar peoc'h,  
 Hadenn an éd taolet er béd,  
 Hadennig paour ar garantez  
 'Vid levezenez eur béd dizaour.

2. Ar stered a gane  
 Bennoz da Vab an neñv,  
 Laboused 'ziskane  
 'N enor da Vab an neñv,  
 Hag ar c'hoajou, ar meneziou  
 A gorolle gand ar moriou.  
 3. An avel a gane  
 Stouet war-zu an Tad,  
 Ha Mari a bede  
 Puchet 'kichenn he Mab,  
 Hag an noz du n'oa mui teñval  
 Gand sklêrijenn eur steredenn.

4. Bugale a gano,  
 Digor o dorn d'ar béd,  
 Bugale a heuillo  
 Mabig ar peoc'h bepréd,  
 Rag an hekleo silet enno  
 A jomo beo, hadet enno.

## LES ANGES CHANTAIENT

1. Les anges chantaient  
 Jusqu'au sommet du ciel,  
 Les bergers entendaient,  
 Tournés vers le ciel,  
 Et l'écho répondait  
 Aux pauvres attendant l'or :

R: Il nous est né le Fils de la paix,  
 Semence de la moisson portée au monde,  
 Pauvre petite semence d'amour,  
 Pour la joie d'un monde sans saveur.

2. Les étoiles chantaient  
 Louange au Fils du ciel,  
 Les oiseaux reprenaient,  
 En l'honneur du Fils du ciel  
 Et les bois, les montagnes  
 Dansaient avec les océans.

3. Le vent chantait  
 Prosterné vers le Père,  
 Et Marie priait,  
 Accroupie auprès de son Fils,  
 Et la nuit n'était plus sombre  
 Dans la lueur d'une étoile.

4. Les enfants chanteront,  
 Leurs mains ouvertes au monde,  
 Les enfants suivront  
 Toujours le Fils de la paix  
 Car l'écho en eux descendu  
 Restera vivant, car semé en eux.